


**Statudoù, reolennadur ha
disklêriadur diazez
Breizhistance -
Dizalc'hiezh ha Sokialouriezh**



BREIZHISTANCE
Indépendance & socialisme

Mellad I – Palioù politikel

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a zo ur strollad politikel a ginnig aozañ ar Bretonezed hag ar Vretoned a-benn labourat a-stroll evit dizalc’hiezh Vreizh ha gant ar c’hoant krouiñ ur gevredigezh dieub eus kement doare korvoerezh.

Emañ o soñj sevel an unvez pobl etre ar re o deus an interest da gemm ar framm ensavadurel evit gwellaat o framm buhez demokratel evit an dizalc’hiezh hag ur gevredigezh gengred.

Evit hen ober e labouro ar strollad war dachenn foran ar stourmoù pobl ha war an dachenn ensavadurel.

Mellad II – Identelezh politikel

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a zo perc’henn war glad ideologel an tu kleiz dizalc’hour breizhek dindan forzh peseurt stumm e korf an dek-vloaziadoù tremenet.

Ne lavar ket ar strollad bezañ e-unan gant an arc’hadur broadel.

Derc’hel a ra kont eus bezañs aozadurioù all a labour ivez evit gwirioù pobl Vreizh evit an em dermeniñ.

Klask a raio, hep dinac’h e identelezh, labourat gant an nerzhioù-se da geñver kevelerezhioù digevzerezh a-benn labourat evit lakaat ur galloud politikel Breton evit an em dermeniñ hag ar justis sokial. Graet e vo gant ma vo bet asantet gant ur c’henurzierezh broadel en a-raok.

Klask a raio labourat ha derc’hel an diviz gant ar re a zo evit un emdroadur ensavadurel e Breizh hag ar justis sokial, gant strolladoù c’hwec’hkornel hag europeat ivez.

Lavarout a ra e gengred gant an holl bobloù a stourm evit o dishualidigezh sokial ha broadel hag a en em spis evel etrebroadelour hag enep-impalaerour.

Lavarout a ra e c’hoant da labourat kengred gant ar re a stourm e Breizh, er C’hwec’hkorn, en Europa hag er bed evit ar frankizioù foran hag a-enep an urzh surentez ha milourel.



Mellad III – Ekologiezh politikel

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a lavar en un doare splann bezañ evit an ekologiezh politikel, ha n’haller ket bezañ digevredet eus an emgann breton evit an demokratelezh lec’hel ha krouidigezh ur gevredigezh reizh war an dachenn sokial.

Kemer a ra perzh e krouidigezh doareoù ekonomikel nevez a dorr gant ar patrom frankizour a zistruj ar bevliesseurtes hag a lak en arvar dazont ar blanedenn a verr dermen.

Lavarout a ra ar riegezh stroll, re wir, eus broad Vreizh war he danvezioù naturel : an dour, an douar, an avel hag an danvezioù dindan-zouar.

Stourm a ra a-enep an holl raktresoù diorren a lak hor planedenn en arvar, evel an nukleel foran ha milourel pe an OGK.

Mellad IV – Gwir ar maouezed

E Breizh hag e lec’h all, e vez c’hoazh lakaet ar maouezed da gaout ur roll dindan war an tachennoù sokial ha politikel. **Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** a lavar neuze e gengred, da geñver labour oberiant e stourmerien d’an emgann enep-seksist hag evit ingalded ar maouezed.

Mellad V – Brezhoneg

Yezh vroadel pobl Vreizh eo ar brezhoneg.

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a labouro neuze evit ma vefe ofisiel ha normalizet implij ar brezhoneg war dirriegezh broadel Breizh.

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a anavez liesseurtes yezhoù Breizh hag ar gwir o devez holl ar yezhoù-mañ da vezañ eztaolet, pa vefent enbroet pa a orin eus Breizh (gallaoueg). Ar gallaoueg, a zo anezhañ un elfenn bennañ eus identelezh Breizh, a rank bezañ kaset war-raok ha difennet e kement lec’h ma ‘z eus ur goulenn sokial.

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a implij ar muiañ ar gwellañ ar brezhoneg en e droioù kehentiñ diabarzh an aozadur hag evit e zarempredoù gant an dud.



Mellad VI- Unvez tirriegel

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a adlavar emañ Bro-Naoned e Breizh.

Sevel an unvez broadel eo hor pal hep dispartiañ eus ar stourm evit ur galloud politikel e Breizh.

War an dachenn stourm-se kenkoulz ha war dachenn ar stourmoù pobl evit an endro, gwirioù ar maouezed, stourm evit ar yezh, **Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** a labouro da gentañ evit lakaat e plas frammoù dibar a roio an dro da enbarzhiñ ar muiañ a hiniennoù da geñver an disentidigezh foran a-stroll hep lakaat ar stourm ensavadurel a-gostez.

War an dachenn sokial e ped ar strollad e izili d’en em aozañ gant sindikadoù stourm a anavez gwir pobl Vreizh d’en em dermeniñ.

Mellad VII – Gwir al labourerien, Gwirioù demokratel, Gwirioù denel

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a ya enep, dre an ober foran :

- d’ar Stad C’hall a zinac’h hon identelezh hag a lak an dizingalded sokial ha korvodur al labourerien da badout.
- En ur hetañ ma vefe skoulmet darempredoù doujus hag heson etre holl bobloù Europa hag ar bed, **Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** a nac’h ar raktres impalaerour Europat a nac’h evit poent hor gwirioù broadel ha sikour ar preizherezh neveztrevadennel hor planedenn.
- d’an nerzhioù sokial ha politikel a greñva ar *statut quo* ensavadurel e Breizh dre o oberiantizoù hag o c’homzoù.
- d’an nerzhioù politikel ha sokial a lak aesoc’h ar c’horvodur hag ar vestroni sokial.
- d’an nerzhioù politikel a bron ar ouennelouriezh, an estrengasoni, an enepyuzeviezh, an heñvelgasoni.
- d’an nerzhioù politikel a bron forzh peseurt doare gwallziforc’h, peurgetket a-enep ar maouezed.



Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a beg ouzh pennaennoù gwir ar pobloù d’en em dermeniñ, gwir ingalded an holl vroadoù daoust d’o ment, evel m’eo bet sammet e-pad pell gant an emsav sokialour bedel. Dre se ne c’hell ket ar strollad SSB mont da gred gant :

- Distruj perzhioù yezhel ha tiriadel dibar pobl Vreizh koulz ha nac’h he istor.
- Kement politikerezh tagus a-enep pobloù all ; skoulmañ a ra **Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** liammoù gant aozadurioù par d’hon hini tro dro d’ar bed ha dreist holl gant ar re a stourm er broadoù dindan vestroni bro C’hall.
- Ar mennozhioù a sav a-enep hag a lak ar minorelezhioù hag ar c’humuniezhioù a-gostez.
- Kement prezegenn diwar-benn mestroniezh ar redoù poblañs a lak aesoc’h ar gomzoù a-enep an enbroidi.
- Ar prezegennoù diwar-benn ar fed eo divankapl an dizingalded sokial.

Mellad VIII – Emezeladur

Hiniennel eo an emezelañ da **vBreizhistance – Strollad Sokialour Breizh**. Dieub eo pep stourmer da vont davet un tuadur pe krouiñ unan.

Ar re a anavez hag a sin statudoù an aozadur, ha forzh petra e vefe o orinoù, a zo ezel dre wir. Ma c’houlenn ur strollad stourmerien pe un aozadur emezelañ da **vBreizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** e ranko neuze an emezadur bezañ asantet gant un div drederenn eus ar stourmerien, paeet o skodenn ganto, a gemer perzh pe dileuriet da vare ar c’hendalc’h broadel.

Ne c’hall ket goulenn emezelañ :

- Ar re a stourm pe a zo ezel d’ur strollad politikel all.
- Ar re oberiant en ur framm sañset dindan guzh
- Izili an nerzhioù ac’hubiñ ha/pe kastizañ.



eil-Mellad VIII – Forc’herezh, digargiñ

Evit bezañ ezel da **vBreizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** eo ret lenn ha sinañ ar statudoù-se.

Evit emezelañ eo ret goulenn ha bezañ paeroniet gant daou ezel paeet o skodenn ganto. Rankout a ra an emezeladur-se bezañ kadarnaet gant sekretour broadel an aferioù diabarzh.

Ma ne vez ket doujet ar statudoù gant unan bennak pe ma sav emzalc’hioù a-enep palioù ar strollad gant unan bennak e c’hell pep hini goulenn ma vefe skarzhet un ezel pe ur stourmer.

Goulennet e vo ar forc’herezhioù dre skrid gant ar framm hag ar stumm raktreset gant ar statudoù.

Ar glemmerien a skriv da sekretour an aferioù diabarzh gant un eilskrid evit sekretour ar poellgor lec’hel. Divizet e vo gant ar burev dre ar muianiver. Ur galv a zo posupl da vare ar C’hendalc’h broadel a ziviz ma’z eus ezhomm dre vuianiver ar stourmerien a gemer perzh pe dileuriet.

Da viken eo neuze ar forc’herezh.

Mellad IX – Kemm ar statudoù

Gallout a ra ar statudoù-mañ bezañ kemmet nemet dre votadeg un div drederenn eus an izili, paeet o skodenn ganto tri miz araok bezañ bodet er C’hendalc’h broadel.

Mellad X – Mareadegzh ar C’hendalc’hioù broadel

Dalc’het e vez Kendalc’hioù Broadel **Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** bep bloaz estreget ma vez dalc’het ur C’hendalc’h dreistordinal hag a c’hell bezañ galvet gant goulenn dre skrid un div drederenn eus an izili paeet o skodenn ganto abaoe tri miz da vare m’eo bet graet ar goulenn.

Dalc’het e vez ar C’hendalc’h dreistordinal ur mizvezh d’ar muiañ goude m’eo bet graet ar goulenn.

Evezhiañ a ra ar burev broadel hag-eñ e vez lakaet da dalvezout ar baridigezh Gwaz / Maouez er strollad pe e-barzh forzh peseurt ensav ar strollad.



Mellad XI – Titl an aozadur

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh eo titl an aozadur. Kement kemm anv pe teskanv a rank tremen dre votadeg un div drederenn eus an izili paeet o skodenn ganto abaoe tri miz hag a gemer perzh pe zo dileuriet er C'hendalc’h.

Mellad XII – Despizadur an heñchadurioù strategel

Divizet e vez heñchadurioù strategel **Breizhistance - Strollad Sokialour Breizh** da vare ar C'hendalc’hioù. Ar mennad heñchadur hollek asantet da vare ar C'hendalc’h a zo troidigezh al linenn vuianiverel hag a zo an dibab difennet a-wel d’an holl gant an izili.

Mellad XIII – Ar poellgorioù

Framm diazez **Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** eo ar poellgor. Ar gwirioù hag an deverioù a zo ar memes re evit an holl izili eus an holl boellgorioù.

Evit krouiñ ur poellgor eo dav kaout 3 ezel dre ret. N’haller ket bezañ ezel eus meur a boellgor.

Rankout a ra sekretour ar poellgor sevel un danevell goude pep emvod ha kas anezhañ da sekretour an aferioù diabarzh.

Ar c’hargoù teñzorer ha sekretour a zo kargoù melestradurel nemetken, hag a c’hell bezañ echu gant goulenn un div drederenn eus izili ar poellgor.

Emveliek eo ar poellgor war an traoù a sell ouzh an obererezhioù lec’hel ha savboentoù lec’hel ar poellgor gant doujañs ouzh :

- ar statudoù
- an heñchadur hollek divizet da vare ar C'hendalc’h a-raok.

Mellad XIV – Ar Burev broadel

Ar Burev broadel a zo ennañ :

- Div vMouezh aotreet (e karg eus an dileuriañ foran)
- Daou sekretour (e karg eus ar mont en-dro diabarzh, eus ar c’henurzhierzh hag eus evezhiañ ar poellgorioù)
- Un Teñzorer hag e eiler (e karg eus an teñzorezh broadel)



- Ur sekretour evit an darempredoù etrebroadel (e karg eus an darempredoù gant ar strolladoù war an dachenn etrebroadel)
- Daou sekretour evit an aferioù diavaez (e karg eus an darempredoù gant ar strolladoù breton ha gall e Breizh).

Mellad XV – Roll ar burev broadel

Gervel a ra ar burev broadel ar c’hendalc’hioù broadel, aozañ a ra ar prantadoù stummañ, degemer a ra ar skodennoù, ober a ra war dro sevel ha skignañ ar c’hannadig diabarzh. Treuzkaset e vez ar c’hannadig d’ar poellgorioù, reiñ a ra ur rentañ-kont resis eus buhez an aozadur. Dre ret ha miziek eo skignañ ar c’hannadig-se.

Mellad XVI – Kendalc’hioù broadel

Dalc’het e vez gant **Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** ur c’hendalc’h bep bloaz d’an nebeutañ.

Dalc’het e vez ur c’henurzhiezh broadel bep tri miz. Rankout a ra bezañ amañ un dileuriad eus ar burev koulz ha dileuridi ar poellgorioù lec’hel. Digor int d’an holl re a bae o skodenn. Kenurzhiezhioù broadel dreistordinal a c’hell bezañ outo, galvet gant ur poellgor pe ar burev, diouzh ar c’heleier.

Mellad XVII – Arc’hant

Arc’hant an aozadur a vez degemeret gant :

1. Skodennoù an izili
2. An dastumadoù foran
3. An donezonoù
4. An arc’hant degemeret a-drugarez d’ar gouelioù, da werzhioù ar c’hazetennoù stourmer pe skoroù.

Pep ezel a c’hell gwelet ar c’hontoù en ur ober ur goulenn evit-se.

10 euro bep miz eo koust ar skodenn, nemet ma vez roet un disdalc’h gant teñzorer ar poellgor.



Mellad XVIII – Stummadur

Div elfenn diazez eus ar strollad eo ar stummadur politikel ha pleustr ar brezhoneg. Ur gwir hag un dever eo evit pep stourmer labourat evit deskiñ, gwellaat ha kompren gwelloc’h ar yezh. Ur gwir hag un dever eo evit pep stourmer labourat evit deskiñ, gwellaat ha mestroniañ an holl vinvioù politikel. Evit tizhout ar palioù-se e vo gant ar strollad ar peadraoù-se :

1. Stajoù
2. Dafar skrivet, skridoù, levrioù
3. Implij an holl varregezhioù diabarzh pe diavaez
4. Digoradur lec’hioù ha salioù

Mellad XIX – Dilennadegoù ha respetoù dilenn

Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh a harpo dreist-holl ar c’houzadoù gant dodennoù kentoc’h broadel pe lec’hel. Servijout a ra an dilennadegoù da lakaat war wel savboentoù ar strollad evit emroadur ensavadurel Breizh hag evit souten ar pobloù a stourm. Kinniget e vo danvezioù bewech pa vo divizet eo ret ober.

Pa ne vo kinniget danvez ebet e vo displeget savboent ar strollad.

Sammet e vez koust ar c’houzadoù d’an dilennadegoù lec’hel gant ar poellgorioù lec’hel o-unan. Gallout a reont goulenn memestra ur skoazell arc’hant d’ur poellgor pe da **vBreizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh**.

Mellad XX – Kehentiñ foran

A-benn brudañ savboentoù **Breizhistance – Dizalc’hiezh ha Sokialouriezh** e vo implijet an doareoù-mañ :

- 1 – Emvodoù kelaouiñ
- 2 – Pennadoù ha kemennadennoù evit ar c’hazetennoù hag ar c’helaouennoù. Gallout a ra pep ezel goulenn gant ar burev ; da viken eo ali ar burev.



- 3 – Un organ kelaouiñ dibar lakaet dindan giriegezh ur poellgor skridaozañ dibabet da vare ar C'hendalc’h broadel hag evezhiet gant ar burev broadel.
- 4 – Un organ kelaouiñ war ar genrouedad anvet *Breizhistance TV* ha blogoù lec’hel.
- 5 – Dafar bruderezh dindan evezh ar burev broadel evit ar c'houlzadoù broadel ha dindan evezh ar poellgorioù evit ar c'houlzadoù lec’hel.

Degemeret da geñver Kendalc’h broadel diazez Felger, 25/10/2009

Enkemmet da geñver Kendalc’h broadel Louergad, 02/05/2010

